

Ar C'hlasker-Bara

Daougrommet war e benn-baz dero,
Ar c'hlasker-boued 'hed an hentchou,
A sant e sac'h leun a draou c'houero,
Naon du bemdez, aon a-wechou.

Ken lent e vez 'raok an archerien
Ma wel o skeud e kement korn,
'Vit an urz vat eo graet al Lezenn
Difennet eo astenn an dorn.

Pa dremen er c'hêriou, a-boan
Ma c'houlenn eun tamm kreun bara,
Eul lonkad dour da ziskenn koan ;
Er c'hoad e kousko peurvuia.

Ar chas 'n eur stenna krenn o chadenn
A razailh war ar paour kaez koz.
An aotrounez, o c'hof diroufenn,
Gant eur sell fall hen kas er foz !

.....

Va zud vat, ma 'z eo leun ho yalc'h,
D'ar paour kaez koz war an hent bras,
Digorit anei frank awalc'h
Evit ma tebro bara c'hoaz.

Kemerit truez ouz e vizer,
Dibrennit d'ezañ dor ho ti,
Grit aluzenn a galon seder
Trugarekaet 'vec'h eviti.

Fañch ABGRALL (*Luc'hed ha moged*)

GERIOU DIAES : **daougrommet** (plié en deux), **a razailh** (aboient furieusement), **diroufenn** (sans plis), **trugarekaet** (remercié), **'vec'h** (e viot).